

CHANSON NEVOE

Composet var sujet

DAOU DEN IAOUANQ

Var don ar SEIZ QUIANT NATUREL.

Goerc'hes glorijs Vari hag hon Salver ho map,
Dihanec'h e c'houlennan sclerijen d'am daoulagad,
Ma hallin caout ar furnez en devoa Salomom
Hag ann talanchou caer en devoa an doctor Ciseron.

Ma mije bet speret da gompren vel ma meus fantazi,
Mije impliet ma amzer da zonet da gomposi
Eur c'himiad leun a zezolation deus ann truezussan
Ha zo leun a c'hilac'har, composet er bla-man.

Me ho supli, Bretonet, prestet ho c'hintantion
Da glevet eur c'himiad truezus pini doucho ho calon,
A zo gret entre ann dud iaouanq renq en em separi :
Ar gard mobiliset ia deus ho bro da gombati.

Goulen a ran diganec'h ann talanchou meus ezom
Da ispliqua ar prepojou a meus intansion ;
An Abostolet evurus hanvet ann Ebestel,
En deus lezet ac'hanomp da ober hon c'hentel.

Quenta moa bet ann enor, femelen iaouanq, d'ho cuelet
E voa er c'hatecis o c'hober ho pasq e toes ar vugale ;
Da zouguen ar rubanou voac'h gant ar veleien laquet :
Ann de-se voa ann de quenta ma moa ho c'haneveet.

Er blaïou varlerc'h e voamp deut er mes ar c'hatecis,
E voamp commanset neuse da roula hon iaouanquis
Ann eil gant eguile gant enor ha respet,
Heb ma cave den netra var hon sujet da laret.

Caer en devoa ar goal deodou lemma ho c'hontellou,
Voat quet vit ho separi bars en assembleou ;
Ne oa quet a voien de da vean separet,
Nemet gant ar maro e vijent surprenet.

Salut, merc'h iaouanq, deus ma c'harantez ann objet,
Me a meus o conduet gant enor ha respet ;
C'hui e ar femelen a neus ma c'honfians,
Nemet da Zoue hebquen rofent ar breferans.

Me a lavar dec'h aman en guirion, ma zervijer,
O c'heus ma gonezei dre ho comzeu tener ;
Possibl e teufe ar c'hæra prins d'am gnelet,
Birviquen ne consanfen donet d'he c'hemeret.

Ho preposiou ravissant a blig din, ma mestrez,
Rejouissa ret ma c'halon gant iaouenediguez ;
Da velet ar fleuren goant, rouanez ma c'halon,
Ann hini deus ma remplisset em c'honsolation.

Mar querit e vefomp hon daou breman uniset,
Evel ma oa goechal ar Verzhèz ha sant Joseph ;
Mar gallan o possedi en deiou da zonet,
Me ve quen joaüs vel ar re zo et d'ar joaüstet.

Dre gommendamant Doue, evit goulen ar c'hras,
An eil gant eguile da gaout ann avantaj ;
Ma trahissan sur ho c'houre'hemeuou,
Doue ma funisso bep heur er malheuriou.

Me lavar deoc'h, ma mestrez, gant consolation :
C'hui c'heus ma c'honsolet em dezolasion,
C'hoas e c'houlennant ar speret neus ann den a verit,
Oll dalanchou ar Profet bras roue David.

Ma mije bet ar pouvoir vel en devoa Alexandri,
Ha vel ma devoa sant Louis pa oa dimp o commandi,
Ann ners hag ar galloud meurbet nerzus,
Vit na vefomp quet commandet gant roue Pruss.

Pa voant em flijadur gant ma mestrez muia caret,
Aru, sivoas ! eur c'helou, e eomp da vean separet ;
Er blavez mil eiz cant dec ha tringuent,
Ar zul quentan a viz du, vit rei da intend.

Barz en bourg peb paros, cals a dud glac'haret,
O clevet e rencje partia ar gard mobiliset,
Goude ma oa achuet gant ar belec an ofern bret,
Gand ar mair e oa ann dud iaouanq galvet.

Gand ar mair e oa lennet ann ordrenans,
Ma rencje ar gard mobiliset heuillan trouplou Frans ;
Cuitad ho bro a renquont ho c'halon leun a c'hlae'har,
Cals ann he garje vijent et en calon ann douar.

An dud iaouanq-man ro d'ann dud da welet,
Ar garante barfet a gleent da gavet,

Evel ma oa ho sad hag ho mam arog de,
E oa an eil o touguen carantez d'eguille.

Hag ar verc'het iaouanq a zo bet glac'haret,
O fiout re er voerset, goude e vent tromplet ;
Pa zonjent e vizent prest da veza unisset,
A beurs ar blanedea diremet e vezent separet.

Pa ve an daou den iaouanq d'ar zui assembles,
Enem gajent promptammant a goste aliez,
Eur garante ar vrassa voa certen entreze,
E vijent unisset tro en pad ho bue.

Cuitad a rencan, sivoaz ! eur vignonez,
Pa renquan mont d'ann arme leun a dristidiguez,
Cuitad a ran honnes, anquenet, sivoaz !
Dec'h tout, quement meus aneveet ann dissign zo bras.

Ann amzer evrus ia da vea tremenet
Vel ann delliou, deus ar gouen, gant ann avel casset ;
Amzer ar laouenedigez a moam-ni er vro,
Pa nemp heuillemp ebars ann assembleo.

Adieu dec'h ma mestrez, fleuren ar iaouanquis,
En em heuil a remp a tao, evel ma voa ar c'his ;
Evel ma re an dud iaouanq a oa bars er c'hapton,
Hep ma lavare den netra var hon stat a fesson.

Va c'halon a zo fraillet dre ners ann hoanadon,
Va daoulagad zo beuzet en eur mor a zaelou.
Hallas ! deut an devez ma renquan ho abandonni,
Pa renquit ma c'huitad vit mont da gombatti.

Adieu, dec'h, ma mestrez, pebez calonat :
Birviquen quen ne mo ann avantaj d'ho cuelat ;
(((ma meus peat eun den evit ma remplassa,
E rencan donet da dilezel ar vro-ma.

Ha c'houi, sperejou evurus, Sent ha Sentezet,
Ar Verc'hez gloriüs Vari hag he Mab biniguet :
Roit din ann ners, ar gouraj em affection
Evit ma momp ann avantaj da zistrei d'am c'hanton.

Tremen ra, zivoas ! ann amzer evurus da james,
Ar bonheur, ar joi hag ar laouenediguez ;
Deut eo ar Prussianet var douarou ar Frans
Da ober peb sort fallentez, ann dra-ze zo ambondans.

A boue ar momet fall ma homp bet galvet,
Bep nos e vent em goele en dessing da gousquet
O tistrei dar guer deus ar brezel blesset,
Pe dollet en hospital gant ann oll abandonnet.

Cri ve ar galon, ma na deu da voela
O clevet ann dud iaouanq breman o quimiada ;
Pa rencont quitad ho bro, e lec'h ma hing ganet,
Ho zud hag ho ligne a zo oll deplotet.

Diganec'h, ma mestrez, e c'houlennan breman
Eur mouchouerda sec'han ma daëro, pa renquan partian ;
Hennes vo merq a garante diganec'h, ma mestrez,
A ma c'honsolasion epad e vin en armez.

Rei a rin dec'h, ma servijer, pa c'houlennet e nep guis,
Hennes vo eur merq a amitie demeus hon iaouanquis,
Possubl ma vije ma c'halon o pije goulennet,
Ma vije possubl e rei, ne mije quet refuset.

Me ho supli, merc'het iaouanq, gand eur galon dener,
Leverit evidomp, breman, peb a bater,
Bredeur a c'hoarezet, pa zomp et e mes ar vro,
Da gaout sonj ac'hanomp bars en ho pedenno.

Adieu, ma mestrez, me zo desolet bras,
Pa rencan donet d'ho abandoni, zivoas !
Pa c'han da guitad, da vont er mes ar guer,
Pedet vidomp ar Verc'hes Vari ma momp eur chans quer.

Quenavo eta relegou hon zud decedet,
Gras dimp d'en em velet en gloar an evurustet ;
Mair, adjoind, testou, ma c'honduet deus an dut a justis,
Pa rencomp accomplissan dessign ar Republic.

Breman, quent fiissan me ho ped, assistantet,
Da c'houlen ar c'bras quent, ma teufomp d'ho cuelet,
Lavaret e ran dec'h teufomp joüs en eur gana,
Vit sec'ha ho taelou pere zo ho tissillan.

Nep neus ar zon-man composet na voar na scrivad, na len ;
He hano, Guillaume Merrer, neus neubut a squient,
Ha zo ganet ha magnet en parez Loquirec,
He hano, eu Breiz-Izel, dre-oll zo publiet.

FIN.

(Propriété.)